

(221, suite)

Sarmon an Nasion,
Prononcet gant eur c'hure e prezans e arizantat.

(222)

En hano an Asamble, pehini a reprezant,
 En hano an District hag an Departamant;
 En oc'h hano ive, Munisipalite,
 Ha c'houi, chef ar c'hanton, venerabl juj de pe.
 Lantermetur homnis non habens cocardum.
 Lantermet e vo tout gement a zoug cocarden.
 Ar c'homzou - ma a lennomp en aviel hirie,
 Nonpas bars en Sant Yan, nag ive Sant Varg;
 Ar c'homzou - ma a lennomp ebars en Decrejou,
 Pe en unan benag a leorion Mirabeau,
 De bras, de caer evit an holl sitoyanet,
 Mes trist ha terrupl d'an Aristocratet!
 Gement a arizto hirio en ofis Divin,
 A zo sur da bignat er barados d'ar fin.
 Rag - se eta, yaouanpis, goude gousperou ver,
 C'houi a allo dansal ar rest eus oc'h amzer;
 Memeus eur violons hag a zo montet mat,
 Me a yel va-unan da zon dec'h d'ar ebat;
 Mes maleur, mil maleur d'ar neb a labouro,
 Mont a rint en beo-buec en corf an diaoulou.
 Neuzse sur e carfent, a greiz fons o c'halon,
 Beza heuliet en tout ar gonestitution.
 Mes gent vit lagat urz ebars en discours - man,
 Gemeromp eur poent fix, hag heulomp anean.
 An Aristocratet a dle beza lantermet:
 Setu va c'henta poent; selaouet-en, m'o ped.
 Mirabeau a dle beza plaset emesq ar gent;
 Erit er quelet scler, selaouit va eil poent.

(223)

Invocation.

Venerabl Mirabeau, toursez ar sclerijen,

192

Dont a rañ d'o pedi : beza on sitoyen .
 Acordit din brema darn eus an eloqans
 Pini ra oc'h admira dre b'evrar c'horn ar Frans,
 Roit din-me ar c'hras da douc calon va oditorer .
 Ma c'hallimp detesti an Aristocratet .
 Ma vezint attouchet d'ar Gonstitution,
 Ha beta ar maro fidel d'an Nasion .
 Plijet ganec'h eta donet d'am arjista :
 Dont a rañ , gant ur fe vras , da gana ca ira .

Genta Poent.

An aristocratet a zo tud dir'ezon,
 A lavar ez eo chanjet ar Religion .
 Evelse e comzont , va breudeur sitoyanet,
 Gementse a zo fos , m'o ped , n'o c'hredit get .
 Ar quin , ar quin-ardant , ar butun , zo e rezon,
 Ne deo get eta chanjet ar quin Religion .
 Ar c'hustum , an taillou a velañ zo lamet,
 Hag an dijuz melin zo ive decretet .
 Lamet eo an degou , ha lamet an premis,
 Emomp eta , ep douetans , ebars er quin iliz .
 Oferenna a reomp evel ma r'ed quechal,
 Guelet mat a rit se , pe otramant oc'h dal .
 Prena reomp ar gambo gant ar memes spillou,
 Guelet a rit var an oter ar memes canteleurou .
 Guir eo ne zelaouomp na Pab na Cardinal ;
 Gementse zo control d'ar Stadou jeneral .
 Heulia reomp epegen ar Gonstitution,
 Ha n'on deus mestr ebet nemet an Nasion .
 Erit beva en assurans ebars er quin lezen,
 Neq de get ret bea eur c'hatolig romen .
 Presta hardi al le , beza sitoyen mat,
 Setu eno quin dever peb christen veritabl .
 An neb ne c'houlennont get dont da brest' sermant,
 A zo heretiget , ep fe na sacramant .
 A zo tud didoue , control d'ar Gonstitution,
 Tud sot , tud insanset , traitour d'an Nasion .
 Eus a doies ar re-all e tlefent bea chasseet,
 Larg'et a chadenou , ha memeus lanternet .
 Rac-se ta me o ped , va breudeur sitoyanet,
 Deut d'o persecuti gant bep sort soign bepret ;

(224)

(225)

Grit dezgo andevri peb sort dismegeanson,
 Ennes eo ar zantela eus oc'h oll devesion.
 Allas ! me va-unan ne meus get bet bepret
 Oute an oll, fureur a gleyen da gaouet.
 Eb dont den tracasi, eur vech ebars en iliz,
 Memeus lêzet unan da ofr ar zacrifis.
 C'hoas e teu din memor : Ur vech var an hent bras,
 Eur beleg refracter dre chans me rancontras,
 Ha - lec'h cranchat en e fas, ha dont den insulte,
 Ne °livris g'er, sionas ! pa na lavare get din.
 En em aqur a ran, avoui a ran va fec'het,
 Hag esperans emeus e vo din pardonet.
 Erit se e c'houlomp assistans Mirabeau,
 Pini zo eur zant bras. En eil poent ni velo.

Eil Poent.

- (226)
- Erit ta ober dec'h anaveout Mirabeau,
 Selavit e elo ebartz en ber gomzou.
 En e an tad genta d'ar Constitution;
 En en deus comandet ar Revolution;
 Dreyan on eus erfin c'avet ar virione,
 Goude bea bevet gen pel en dalente;
 Chaseet dre sclender ar Constitution,
 Nos-teval an erreur hag an ompinion.
 Pet abus diremed ney deus-en get lamet,
 Pet a boenthou dies ney deus-en ergetet !
 En eo en eus troc'het raz barr ar Gabusinet;
 En en eus divisget froq ar Recoletet;
 En en eus chaseet dimeus o c'houenchou
 An oll Relijuzet, quertzet an Ilizou.
 En amzer dremenet, erve ar foz lezen,
 Ne voa permetet dec'h laret q'ir rust da zen;
 Erve al lezen neve, m'ar doc'h sitoyen matl,
 C'houi a el, ep danger, cana pouill ha pilad.
 En amzer dremenet, erve ar foz lezen,
 N'ocuec'h carg ebet, e voac'h esclavourien;
 Erve al lezen neve, mar doc'h sitoyanet,
 Ez oc'h Munisipal, Merriou pe Notablet.
 Gouir e ar c'hargou - ma a rer oli en gratis,
 Ha goude an honor, noc'h eus gen benefis.
 Ha c'houi zoc'h vit nebtra servich an Nasion,
- (227)

194

Ha donet da zuporti ar Constitution.
 Goechal ho p'lezen a voa qer scrupulus,
 Ofriec'h d'e boutaillat, e teuent d'o refus;
 Brema ni ya enni, eb-carez mezh ebet,
 Hag eva frang hor lod, offrit d'emp da velet.
 Panere Mirabeau, birvigen n'or boa bet
 An oll avantajou qer caer ha ma velet.
 Hag, erve 'leverer, en deus bet doganet
 Lals eus a fransizien, memes sitoyanet.
 D'e Dad, couz ha d'e Yam en deus grêt prosezou;
 Nemet tregont goech ar miz ne r'e re-gorfajou.
 Guir eo, an traou-ma tout zo imperfectionou,
 Hag a ro muioc'h-mui eclat d'e dalanchou.
 Nonobstant eus a ze, evel Sant e vo sellet,
 Gant an Democratet, hag ar guir sitoyanet.
 Piou ac'hanoc'h brema ne verzo get touchet
 Eus an oll avantajou qer caer vel ma velet?
 Tud ven ha tud superb, deut da bresta ho le;
 Mar doc'h tud orgouillus, Mirabeau voa ive.
 Evintan da vea maro, an orgouill zo bepret
 Ebars en assamble, en tribun arzet.
 Tud avarasius, dec'h e teuan breman:
 Desirout a ran ferm dont d'o convertissa.
 Brema an uzullerez a zo dec'h permetet;
 Petra ar fouellu a ra dec'h eta na doufac'h get?
 Prestit hardi al le, ha miret en ato,
 Aman e permetet qercouls hag er Stadou.
 Gement zo sitoyen a dle bea amportet,
 Ha criz evel eur tigr, pe eur blei arajet,
 Memes furiosoc'h vit ne deo ul leon,
 Erit gallout difen ar Constitution.

(228)

Dec'h e teuan breman, c'houi oll tud direglet,
 Erit terri ho panchant, ney em dourmantet get.
 Gant contrat, ep. contrat, jouissit eus ho c'hoant,
 Mirabeau er gre ive, ha goussoude zo Sant.
 Dec'h e teuan breman, c'houi oll, tud diegus,
 Nen de get ret pelloc'h beza laborius;
 N'oc'h eus nemet dougen, fuzuil, sabren dre g'er,
 Ha qerc'hat arvizion h'elezen refracter,
 Ep dont aman hirio, n'oc'h en em assamblet,
 Gant desir da reseo eus va feurz eur bouquet.

(229)

Hag evel moc'h daou rum dud, emeus ive clasqet
 Diou fleuren diferant da rei dec'h eur bouqet.

Ar bouqet a rin dec'h, va breudeur sitoyanet,
 Eus a eur fleuren seul a verzo compozet:

Bezit bete ar maro fidel d'an Nasion.

Me ro dec'h evit bouqet ar Constitution;

Bezit dez'i fidel, betek ha goude ar maro,

Ha goude assambles serten ni n'em gavo.

Gant he permission, va breudeur sitoyanet,
 E rin ive eur bouqet d'an aristocratet.

(230)

O bouqet a verzo eus a bemp cant fleuren:

Me zouet de brezel, qermez hag ar vosen,

Ar c'hangren, ar goutou, hag an apoplexi,

An droug-qein, an droug-yen, hag ar paralisi;

Me gare o goelet gant an oll meprizet,

Errant vel ar Boudedeo, dre oll persecutet,

Pe e vent chassecet pell d'an enezennou,

Pe laqet er prisoniou, carg'et a chadennou.

Ouspen: evit disting'i ar sitoyanet fall,

Me gare o goelet mud, tord, cam, born pe dall.

Finissomp en eur g'ir. Dec'h, aristocratet,
 An oll fleurennoù caer-ze a roan evit bouqet.

Neuze an oll sitoyanet a lavaras Amen.

Ha me, var g'emfentise a zonjas en em den.

fin.

(Vol. II, p. 221-230.)